





DCL BRETON

Diplôme de Compétence en Langue

Session du samedi 20 juin 2015

Mise en situation et Dossier documentaire

Mise en situation du candidat Setu piv oc'h hag ar pezh ho peus d'ober		page 2 / pajenn 2
 Diell 1	Kinnig labour: Kazetenner (ez) radio	page 3 / pajenn 3
 Diell 2A	CV Mannaig BOURHIS	page 4 / pajenn 4
 Diell 2B	CV Efflam KASTELL	page 5 / pajenn 5
 Diell 3	Kazetenner brezhoneg e pevar c'horn ar vro	page 6 / pajenn 6

TREIÑ AR BAJENN / TOURNEZ LA PAGE

Setu piv oc'h hag ar pezh ho peus d'ober Mise en situation

Loeiz(a) AN ANEVAL oc'h.

E *TutaBreizh* emaoch o labourat, ur c'habined tuta ha kuzuliañ.

Da glask ho peus ur c'h/gazetenner(ez) evit *Reiñ da c'hoût*, ar gevredigezh a vod ar radioioù brezhoneg.

Goude m'eo bet gwelet an dud a oa war ar renk gant kenlabourerien deoc'h e chom daou

zen ha ret e vo deoc'h dibab unan anezho.

Evit gwelet sklaeroc'h e pellgomzoc'h d'ar c'h/gazetenner(ez) a zo war ar post-labour-se evit c'hoazh, Kelig Gonideg e/he anv.

Da c'houde e skrivoc'h ul lizher da guzul-merañ ar gevredigezh *Reiñ da c'hoût* da lavaret piv ho peus dibabet.

Vous êtes **Loeiz(a) LANNEVAL**.

Vous travaillez pour TutaBreizh, un cabinet de recrutement et de conseil.

Vous devez recruter un(e) journaliste pour l'association *Reiñ da c'hoût*, qui regroupe les radios en langue bretonne.

Après l'entretien que vos collaborateurs ont eu avec les candidats, il en reste deux et vous devez choisir l'un d'entre eux.

Pour vous aider à faire ce choix vous contacterez Kelig Gonideg, le/la journaliste qui occupe actuellement ce poste.

Puis vous présenterez par écrit votre choix définitif au conseil d'administration de l'association *Reiñ da c'hoût*.

Diell 1

KINNIG LABOUR : KAZETENNER(EZ) RADIO

Ar gevredigezh *Reiñ da c'hoût*, a zo o vodañ ar radioioù brezhoneg (Bro-Leon FM, Radio Mervent, Radio Bro-Ereg, Radio Poc'hêr), a zo o klask :

Ur c'h/gazetenner(ez) b/vrezhoneg.

Diplomoù : bachelouriezh + 3.

Skiant-prenet war un dachenn (dam)heñvel goulennet.

Brezhoneg mat, komzet ha skrivet.

Kaout ur spered dielfennañ ha kenaozañ.

Bezañ anaoudek war dachenoù a bep seurt.

Bezañ barrek da zaremprediñ an dud.

Bezañ gouest da labourat gant tud all.

Gouzout ober gant an urzhiataerioù.

Mestroniañ teknikoù ar skridaozañ hag ar c'hazetenneriezh radio.

Kaout an aotre-bleniañ B hag un oto.

Kondisionoù labour ispisial :

- Labourat da noz hag e-pad an dibennoù-sizhun ;
- Kenlabourat gant tud all en ur rouedad radioioù ;
- Post lec'hiet e Radio Mervent e Pouldreuzig (29).

Pegoulz ? An abretañ ar gwellañ.

Pegeit ? Kontrad didermen (CDI).

CV da gas dre lizher a-raok an 30/05/2015 da

TutaBreizh

57, ru Laenneg

29000 KEMPER

l.ananeval@tutabreizh.bzh

Diell 2 A



Mannaig BOURHIS

2bis, straed Jean Jaures

29200 Brest

06 04 98 35 65

28 vloaz – Dimezet, 1 bugel

Kazetennerez

SKIANT-PRENET

E-pad 6 miz : Kazetennerez e France Inter, kontrad termenet, Pariz

E-pad 8 miz : Kazetennerez e France Info, kontrad termenet, Pariz

E-pad ar bloavezhioù-skol : Meur a staj e radioioù a bep seurt (France Info, France Culture...)

E-pad 2 vloaz : Renerez kampoù-hañv, Capjunior, Pariz

(sevel ha merañ ur skipailh animatourien, sevel ur raktres pedadogel, merañ ur budjed, mont e darempred gant tud e broioù estren...)

E-pad 5 bloaz : Animatourez e kampoù-hañv evit an deskiñ yezhoù d'ar grennarded, Capjunior, Pariz

(beajiñ hag ober war-dro krennarded e Europa a-bezh : Barselona, Cardiff, Praha, Berlin, Budapest...)

Sonjoù nevez :

- sevel abadennoù war ar c'hoarioù a-stroll
- reportajoù diwar-benn bretoned an diaspora
- kinnig c'hoarioù d'ar selaouerien
- kentelioù brezhoneg

STUMMADUR

2013 : Master 1 Skiantoù ar C'helaouiñ hag an Daremprediñ, Ecole Supérieure de Journalisme, Pariz

2011 : Aotreegezh Skiantoù ar C'helaouiñ hag an Daremprediñ, Ecole Supérieure de Journalisme, Pariz

2008 : Aotreegezh war an Istor asambles gant Aotreegezh war ar Brezhoneg, skol-veur Roazhon

2005 : Bachelouriezh ES, Lise Diwan, Karaez

BARREGEZHIOÙ

- BAFD (renerez kampoù vakañsoù) / BAFA
- Meziantoù anavezet mat : Word, Excel, Power-point, Illustrator / Ober gant ar Genrouedad
- Brezhoneg skrivet ha komzet - DCL live 5
- Saozneg : 1 bloavezh Erasmus e Budapest, Hungaria
- Aotre-bleniañ B

OBEREZHIOÙ E-MAEZ AL LABOUR

Teñzorerez klub echedoù Brest

Sonerez violoñs

Sekretourez AEP (Kevredigezh tud ar vugale) skol Diwan Ar Gwel-Meur, Brest

- Intrudu, c'hoant mont war-raok war he micher
- Strizh ha kempenn, betek re?
- Libr d'an dibenn-sizhun ma vez gouezet en a-raok

Diell 2B

KASTELL Efflam

Dispartiet, 45 bloaz

Kazetenner

15, hent ar Bonedoù Ruz, 29270 Karaez

02 98 93 65 87

**Micherioù****Abaoe 5 bloaz : Kazetenner e Radio Kreiz-Breizh - St Nigouden****E-pad 6 vloaz : Marc'hadour-koñvers e Coopagri - Gwengamp****E-pad 11 vloaz : Labourer-douar - Boulvriag****E-pad 2 vloaz : Objektour a goustiañs – Ti ar C'hoadoù - Ar Chapel Nevez****Studioù****Aotreegezh war Gonterezh ha Mererezh an Atantoù – IUT – Montroulez****BTS A Merañ ha Gwareziñ an Natur – Lise Suscinio – Montroulez****Bachelouriezh D' – Lise Suscinio – Montroulez****Traoù all :**

BAFA

Aotre-bleniañ B

Yezhoù : Galleg, brezhoneg (komzet ha skrivet), saozneg

Urzhiaataerezh : Word, Excel, Powerpoint, Paint Shop Pro, Dreamweaver

Prezidant klub velo Karaez

Ezel eus Bretagne Vivante

- Brezhoneg yañh ! : bet desket gant e vamm-gozh
 - Den yolek, kontant da gregiñ e-bargh, met daoust hag eo urzhiet an traoù gant.
 - Libr d'an dibenn sizhun, ma vez gouezet en a-raok

Soñjoù nevez:

- Sevel abadennoù nevez: an natur, ar sport...
- mont pelloc'h gant ar radio war internet
- kinnig abadennoù da lakeat an dud da c'hoarzhin.

Diell 3**Kazetenner brezhoneg e pevar c'horn ar vro**

P. Mengi

Bep mintin e c'heller klevet keleier teir gwech etre 7 eur ½ hag 8 eur ½ war ar peder radio brezhoneg a zo e Breiz-Izel (Bro-Leon FM, Radio Mervent, Radio Bro-Ereg, Radio Poc'hêr) ha war al lec'hienn reiñ-da-c'hoût.bzh o deus savet asambles. Ha keleier fresk adarre kerkent hag an abardaez, da bemp eur hanter. Pevar gazetenner emaint, o labourat evit Keleier Breizh. Paol Mengi a zo unan anezho.

Labourat a ran evit *Keleier Breizh* dreist-holl, hag ober a ran reportajoù berr war an dachenn, diwar-benn traoù a bep seurt : politikerezh, ekonomiezh, sevenadur, sport...

Ur c'hazetenner zo e pep radio. Aozet e vez un emvod skipailh bemdez dre Skype, war-dro 9 eur ½, evit komz eus ar pezh a zo c'hoarvezet e kement korn eus ar vro. Ha da bep hini d'e dro da ginnig ar journal. Evit ar week-end e labouromp ivez pep hini d'e dro.

Ur wech an amzer e tegouezh deomp mont betek Breizh-Uhel, pa vez un emvod a-bouez gant ar C'huzul-Rannvro, lakomp.

Ar pezh a blij d'ar selaouerien eo e vez liesseurt ar sujedoù hag e vez klevet komz eus meur a dachenn e Breizh-Izel. Ar pezh a blij dezho ivez eo klevet meur a vod da gomz brezhoneg. C'hwec'h pe seizh vloaz zo ne oa ket eus ar c'heleier-se : 'm eus aon ez eo ur prenestr digor war draoù all, en tu all d'ar pezh a vez kinniget e-pad an abadennoù animasion, a zo troet kentoc'h war ar sevenadur hag an hengoun. Digeriñ a ra war sujedoù all, gant tud all da glevet. An dra-se zo ur binvidigezh.



Me, ouzhpenn ar c'heleier, a ginnig ur magazin div wech ar miz, abadennoù berr meur a wech bep sizhun, hag un abadenhir ur wech an amzer. Klask a ran komz eus ar pezh a blij din.